



CHANSON AL LEVITEN.

Var un ton distinguet.

AN trivac'h eus ar mis-mâ e meus occasion
Da occupi va speret da gomposi ur son :
Unan benac a c'hoerzo o clêvet anezi ;
Deus eur c'hostez all m'em bo marteze fachiri.

Ar sujet eus va chanson eo an dallediguez
A so erru guel gommun etoués ar merc'het qèz ;
D'ar gloar ha d'ar vanite int so en em livret,
Envel cracq demeselet e zint erru guisqet.

Dre ze-ta, potret yaouanq, pa heet da vale
Evit guelet ho mestrez, m'o havertis a se,
Da visqa eul Liviten pa héet d'o guelet,
Car potret o méstrennou na nint tam respetet.

Mar gariet en o si guisqet prop gant mestrén,
C'houi a vo diguemeret vel un distoladen ;
Ha ma chommit da goania , patates ô pezo ,
Defot da gaout liviten , guisqet evel un otro .

Ma herru unan var varc'h , ul liviten gantàn ,
Ar plac'h yaouanc deus ar sal velo aneàn :
Dont a rêi d'e diguemer gant cals eus a respect ,
Dre m'en deus eul liviten e veso régalet .

Ar plac'h yaouanc a Iaro d'ar mevel eus an ti :
Leqet prim marc'h an Autrou ebars er marchossi ,
Ha qesset e valisen bars er gambr uélàn :
Feanos e momp an enor d'e gavet da goaniàn .

Qement a vo bars en ti deus a servigerien
Vo e prepari e goan da bot e liviten .
Darn a laso ponsinet , a darn all perdrien .
Guelet peguen brao e se cavet eul liviten !

Guelet a ret , tud yaouanc , gant tout oc'h oll voyen
Na noc'h estimet netra ma no heus liviten .
Chanch a gustum a vo ret . Me a ro déc'h ali
Evit bea respectet gant ar merc'het a di .

Guelet o c'heus sclêramant nac a zispign a ve ,
Pa erru pot liviten en o si da vale :
Ponsinet , perdrierien , güin côs , en eur guir ber ,
Eus a bep seurt liqueurieu , bonboniou vit dessert .

Pa ve pot e liviten partiet en e dro ,

Bremàn var ar bansion economi a vo :
Unan benac a santo deus an dispigu so het,
Eur bansion difripon , patates vo hep pret.

Eur rumach all a so c'hoas a zoug livitennou ,
O deus cals education a nebeut a vadou ,
A voar parlant dre brincip , cals a sqient gant se ,
Ma parvenont da gavet merc'het o deus leve.

Bremàn en deus an desir da gaout eur garg benac
A Noter , pe a Avocat , a so etajou mad.
Laret a ra d'e bried ebars en comzou bër :
Red e vo guersa levé evit caout carg un Noter.

E bried a lar deàn : contant òn deus a sé ;
Me ro dêc'h otorite da verza va leve.
Pa po ar garg a Noter , me vo neuse Itron ,
Hac a vezo respectet gant an oll haaton.

Güel eo ganén angaji an anter va mado ,
Evit caout un turier douar gant e oll mestrennou.
Bremàn ni vo everus , a vevo disourci ,
Hac arc'hant bras a gueo bemdé bars en hon ti.

Bremàn pot e liviten , gant e garg a Noter ,
An num livras d'an deboch na voe qet pell amzer :
Bemde e mèn o versàn leveou an Itron ;
Ma sint rentet malurus , nac ne qet hep rêson.

An Itron guèz a grio bremàn a boues e fen :
Me so a gren revinet gant pot e liviten :

Mepriset a voa ganèn guechall pot e vestren ;
Deut eo aben gant e arhant da brena va moyen.

Me o ped, merc'het yaouanc , da guemer ahanon
Velt a velet da exempl d'an oll ebars er vro.
C'hoant bras e moa da vea guisqet bars en roben ;
Eur hars a vo din bremàn cavet cotillonen.

Va friet livitennec allo bremàn monet
Da honnit et dam barra dar parcq da labouret,
A dispen e liviten a gaffent ve mad hoas ,
Da ober un tamim brago d'e vuguel so en noas.

F I N.





CANOÛEN AR WIRIONEOU.

Var un ton anavezet.



BETE hen eus clêvet cana niver a ganaouennou,
Mes n'eus get, herves va memor, canet ar Gûirioneou;
Rac-se òn decidet hirio da laqat var ar paper
Traou hanavezet vit gûirion, ha nonpas evit guêvier.

Evit peb tra, a lavarer, e zeus eur gommançamant;
Rac-se, herves ar c'hustum-ze, pini a zo deus va c'hoant,
E commànçin va c'hanaouen dre ar penn qenta amâ:
Digorit mad ho tiouscouarn evit clêvet an traou-mâ:

Ar goulou, pa vez alumet, a deu da sclêrijenna;
Al lin ermès eus an douar neus get ezom d'e denna;
An naon n'en deo get ar sec'hed, eur penn touz a vanq
a vlêo,

Hac an hini n'eo qet bouzar ordinalamant a glêo.

Pervuia' zoar dizalteret en eur eva un dour fiesq;
Un eujen n'eo qet ur vioc'h, nac ul lapous, nac ur pesq;
Pa vezer o tijunia, na vezer qet o coannia,
Ha pa vezer o verenna, na vezer qet o leina.

An hini en deus ul lagad certenamant n'eo qet dall,
Hac epad ma chommàn em zy ne ven james e lec'h all.
E mis cost e ve peurvuia doñnet an hed var al leur,
Pa son an horolach creizde assur ne zon qet un heur.

Ne zeus netra var an douar a guer yen evel ar scorn;
An hini en deus daou lagad n'en deo qet na dall na born:
Evit salla amann pe guig e zeus ezom a holen,
Ha pa c'hilaz va zreid em boutou ne deo qet ebars va fenn.

Qement tra zo var an douar gant an amzer a dremen;
Ne zeus netra a eternal nemet Doue hep muiqen.
Güerlisqiu n'eo qet Montroulez, Qemper n'eo qet Sant-
Briec,

Hac an hini zo lous e fri a hanver eur mic'hiac.

An den fur n'en deo qet diot, an den sot d'en deo qet
fur;
Ar voeliou en eur vatimant ne dint qet stag ouz ar stur.
An treid a zo pell diouc'h ar penn, ar scoas zo tost d'ar
gouzoug,
Ha pa ra un dra vad deomp, certenamant n'eo qet droug.

Oc'h eva re a win-ardant e teuer d'en em vesvi,
Ha pa dostaer re d'an tan e risqer d'en em lesqi.

En eur bara a anter-livr eus ouspen ur c'hartouron ;
Pa hader güinis en douar , na zivoan qet a velchon.

Un den hac a zo divalo na gaver qet un den brao ;
Custum e zoar d'en em c'hlebia o chom re dindan ar glao.
Na eller qet , allas ! atao caout qement tra e zeus c'hoant ;
Ne dalvez qet ur yalc'h gollo ur yalc'had mad a arc'hant.

P'en deus ur c'hlànvoir an derzien ne ma qet entye-
c'hed mad.

Va mab n'en deo qet va fotrez , ha va mam n'eo qet va
zad.

A guement den zo beo hirio , nicun dec'h na voa maro ;
N'eo qet gan eun troad scubelen e rêr d'an dud o baro.

Ar fri zo e creiz ar visach , placet etre peb scouarn ;
Pa baqer un neiz er vezen na baqer qet eul louarn.
Pa valeer sonn ne zoar qet anter-pleg var an daoulin ,
Ha qement azen zo er vrô ne maint qet oll er velin.

Güelet e meus bet rec'hier mein , dour ebars er rivierou ,
Lapousset o nijal en ear , güez ebars er forestou ,
Clesqeret bars el loaguennou , ha pesqet ebars er mor ;
Ha pa zerràn va daoulagad den n'ell o güelet digor.

An hini a zo pinvidic n'eo qet certenamant paour ;
Pa chommer da feneanti na zastumer qet a aour.
Dec scoët a dalvez trêgont livr ; pa ve nôs n'en deo qet de ,
Ha pa ven ebars va goele me ne ven qet var vale.

Qent ma teuis var an douar ne voan qet eus ar bed
c'hoas ;

Ná veler qet gouez jardinou o touguen avalou poas.
Va zad ha va mam voa ganet arozòn, a lavarer,
Ha pa laquent o boutou coad ne voa qet o boutou lèr.

Va greg ha me voemp demezet hon daou er memes devez;
Pa ne zeus netra d'am geni n'en em gavàn qet dies.
Va bugale a voe ganet o tonet var an douar;
Na vez james teval an nòs pa sclêrijen caer al loar.

Pa ve goloet an amzer eo teval cazi atao;
Pa ve sclêr an eol benignet e cavàn an amzer vrag.
Ur c'harad colo zo scànvoc'h eguet n'eo ur c'harad plom;
Pa ra glao ne ra qet sec'hlor, ha pa zeo yen n'eo qet tom.

Achuomp hor c'hanaouennic, rac peb tra e deus e fin;
Eürus ma ell dont d'ho laqat un nebeudic da c'hoarzin.
Ne garfen qet e ve cavet nep habec ebars enni,
Rac ne zònjen e nep seurt drouc pa zoan ouz e c'homposi.

Ar zonic-mâ zo composet evit tremen an amzer,
Ne meus-hi qet bet grêt re hir dre ma e meus-hi grêt bêr.
Mad pe fall e vezo cavet gant an hini e c'hano:
An hini en deveus-hi grêt n'en deo qet Stris e hano.

FIN.